


VA C'HALON A ZO POUNNER




Va c'ha-lon a zo poun-ner : Ar




plac'h a bli-je din, War-c'hoazh a vo di-



me-zet ; Da glask un all ez in. Mont



a rin da var-to-lod, Da o-ber tro ar



bed ; Me 'gavo meur a u-nan Er



por-zhioù bras be-pred.

Va c'halon a zo pounner :
Ar plac'h a blije din,
Warc'hoazh a vo dimezet ;
Da glask un all ez in.

Mont a rin da vartolod,
Da ober tro ar bed ;
Me 'gavo meur a unan
Er porzhioù bras bepred.

— Siouazh, ar vartoloded
'Zo peorien, va mignon ;
Gwell dit mont da varc'hadour,
Mar kredez ac'hanon.

Ha pa vi deut pinvidik,
Pa vi un aotrou bras,

'Tre an holl blac'hed gentil,
'C'helli ober da choaz.

ROPARZ HEMON.

(Hervez un ton a Vro-Gembre.)

Marc'heger ar Gergoad

gant YEUN AR GO

a zo e gwerz e ti. - F. BASSET, 7, rue
des Francs-Bourgeois, RENNES. - C. C.
Rennes 30-73. - Priz : 8 lur.

Le Gérant : G. BERTHOU.

IMPRIMERIE CENTRALE DE RENNES.